

CHANSON AR PLAC'H FIGUS.

Var ton : *A bell e va Tibull, Orid hac Orphée, etc.; pe Chanson Cupidon.*

En em dennet en han egnis eur soliter,
En eur jardin fleuriet, odorant, saluter,
Trist ha melconius e lavaran ousin :
O te fleuren charmant a velan da fin !

Te a bronostic neant, grandeur ar bed
Pini a zisparis evel eur bouill moguet !
O sujet effroyabl a veditation,
O sonjal pis ennot, piau n'a ve en eston !

Guechal o studia er gaer deus a gastel,
Me am boa bet lennet en eul levr immortal,
Eur fablen remerquabl var sujet eur plac'h yaouanq
Hac e doa refuset cals fortunion brillant !

Mæs pluen La Fontaine dre valheur zo collet
A dont l'he imita jamæs ne vo gallet ;
O genii puissant ! me n'a hellin biqen
Laqât e brezonnee graçon eun seurt fablen !

Oc'hpén ma zeo rust ha paour ar brezonnee,
E renquer caout talant a speret da brezee,
Da gompos eur chanson evit renta patant
An nerz eus ho fablen a tor ho plac'h yaouanq.

Ar plac'h a r'ar sujet deuz va c'hanouen
A voa e general admiret gant peb den ;
He c'horf a voa charmant, he c'homsion eloquant,
Yaouanq e voa ive ha boqet excellent !

He guenet a vrill evel eur berlezen ;
He diou jod a voa ru evel diou guerezen ;
Scolliet e voa ive gant he mam hac he zad,
Ne vanque seurt dezi pe devoa leve mad !

Tud yaouanq distinguet a gaff ar plac'h yaouanq ;
Fountet int e leve, puissant en arc'hant ;
Humblamant e c'houlennont he dorn da zimesi
Mæs fier e respount : « n'oc'h qet d'am faltasi ! »

Ho gerent, emezi, certain a zo fountet ;
Mæs allas ! ne dint qet avoualc'h estimet
Vit sonjal pretanti ober eun allianc
Gant plac'het va seurt-me pere a dal noblang !

Rac-se, guerzet yaouanq, conservit ho poutou
Evit mont e lec'h all da glasq ho priejou ;
C'honi tout a zo bianic, me bretand caout d'am guis,
Clevit ganem ama, n'oun qet Jannet ar squis.

Hema en deus speret, mæs allas ! ne qet coant ;
Hennes en deus guenet, mæs n'eus qet a arc'hant ;
Eguile a zo mesvier, eun all a zo re zen ;
N'eus hini anezo da c'houde ar femellen !

Ton ar baysantet a gaff cals re izel ;
Bourc'hisien a vepris gant eur galon buel !
Gouscoude an noblang ne sonjont qet enni ;
Mæs gant he figur gaër ema tout he souci !

Jaloux evel Narciss (1) ec'h admir he guenet ;
Mæs hy e Narcissen biqen ne vo chenchet ;
Rac Saturn a duyo hardis evel eul laër
Da scuba gant he falc'h guenet ar plac'h fier ! (2)

An amzer a ravach an dir hac an houarn ;
Dious clemou tud ar bed e stang he ziscouarn.
Peb generation prount a zo ramplacet
Evit rei plac' d'eun all a zo, d'he zro, chenchet !

Plac'hic, deus va chanson me vel var ho bisach
Deus an oad adosta ar mercou, ar ravach,
Ho tal a ya da rida, ho tiau jod da voenvi,
Ho bleo blond a goezò, adieu, an dimezi !

Ar botret dispriget a yelo en ho zro,
A re-all disterroc'h souden o remplaço ;
Mæs, plac'h, e n'em hasit, dimezit prountamant,
Ober a hellit c'hoas eur pas honestamant.

(1) NARCISS, hervez ar mythologii, a oa eun den yaouanq
caër bras en he c'hênet. Un devez, er chasse, en em gavas
dirac eur feunteun seker e pini en em admiras qement, ma
teuas da veza jaloux anezan e unan. Er c'bis-se e teuas da
languissa hac e oue chenchet en eur fleuren gaër galvet, deus
he han, NARCISS.

(2) SATURN a réprésant an Amzer. Armet eo deus a eus falc'h
gant pini e scub hac distanc'h pep tra.

Me o c'ast, emezi, eun tanié ridiél,
O tont da bropos d'in fortunou hep mûsul,
O tonet d'am pressé en digarez oad
Da ober alliañ gant peorrien anat !

O pebez bas velen, o pebez discourser !
C'houi a fell deoc'h eta e siffen va affer
Gant potret diasez, pe gant cox-intaouvien,
Mæs allas ! camarad, me n'oun qet eur soden !

Fountet oun e leve a deus eur famill vad,
Pa guirín, gant henor, me rayo va c'hrogad ;
Mæs deport a rin c'hoas eun neubendic amzer,
Rac o ven yaouanqis, jamæs sûr ne squiser.

Ar plac'het yaouanq fur ne diat qet presset bras
Da rei ho liberte evit cousquet gant goas ;
Guell eo ganto certen monet d'ar pardonniou,
Caër evel princeset da c'hoapat ar yannou !

Imprudant bras e ve dont da veza potres
Goude gant plijadur beza bet ar vestres,
Forcet he peb fêçon da soubla, da zenti
Oc'h eun den soupçonus a leun a jalouzi !

Honnès e ve ar joa guelet eun den mechant
O tont da garnachi goude dispign arc'hant,
O tont leun a goler da sonjal commandi
Ar pez n'eo qet capabl e unan da regli !

An oll, plac'hic yaouanq, ne dint qet tud mechant ;
Cals a voar anezo espern mad ho arc'hant ;
A ma tenont aveichou da ober gourdrouzou
Eo gant aon na gouste re an dantelezou !

Ho discours, va den mad, a zo neubent fountet ;
Parkant a rid brema eus an avaristet ;
O pebez levenez eve dime beva
Gant eun tyrant crassus a rae din clasq bara !

Tavit eta, m'ar plich ; me gar va liberte ;
Countant oun plac'h yaouanq dre ar c'hrag a Zoue ;
Ravisset e qersin da ober cadançou,
A da fredoni gat o parlant d'ar yannou !

Mæs allas ! potrezie, pa vo ridet ho min,
N'o peo qet a yannou da zridal, da c'hoarzia,
Oll neuze o lezint en eur joa ho fen,
Re goz eo, emezo, bisach ar femelen !

Eur figur discaret a zo nebeut nerzus
Evit sonjal attrap yaouanquis gobias ;
Rac minet gant amzer, ar rozennic goenvet,
Adieu, qenavezo, n'eus qen a c'halantet !

Tud deus an trede urs a barlant c'hoas d'ar plach ;
Mæs allas ! dister int, ne dleomp qet brema nac'h ;

Guerzet hep tam leve, commencet da rida,
En eur gær tud chommet calzie re hir da dreina !

Ar femellen figus anflammet a goler,
A ra dezo scuba proutamant eus he c'haer,
O lavaret dezo gant eun aer ourgouillus :
« Perac e tui aman, banden peorrien mezus ! »

Goall hardis o cavan en ho pretantion
O tont da glasq mere'het deus va c'hondition ;
Chenchit da santimant a ne zuit mui
D'am z'y qen affrontet vit va dishenori !

Plac'hic deus va chanson Saturn zo direspet,
Pa zavor an houarn, e ruino ho quenet,
Ho roz a perisso, c'houi vezo en glac'har,
Mæs caer o peo crial, e raï scouarn vouzar !

Eun ty pa vez coëzet a helleur da zével,
A da rapari couls, aliez memes guell ;
Mæs allas ! femellennic, ho charm a dremeno,
Evel eur vogueden, a den n'er reparo !

Vit souten qemenman, passeomp dre eur jardin
Ramplisset a ros caër, a lys hac a jasmin,
Eno e n'em rentet ni velo peb minuten
Beteç ar vourjounen o pilat un deillen !

Ar bourjoun a zec'ho prest gant ho ornamant !
Ivez ho sort, allas ! plac'hic yaouanq ;
Mæs c'hoas ma n'am c'hredit, clasqit eur mellezour,
Ennan e velfot selker ravach oc'h adversour ! (1).

Ar selassen a grio : « plac'h, demez proutamant ;
« En da c'hénet ez eus calzie a chenchamant ;
« Bet ont Venus hor bro, mæs allas ! ne dont mui !
« Entent eta rêson, m'ar sonjes dimezi ! »

Ar femelen oaget a zo ato fier :
Er fortunion brillant cals c'hoas ec'h esper ;
Ar poënt a zo tremenet, erfin eza 'eun tu,
Mæs petra 'deus-y nemet eur *malotru* !

A comprenet oc'h eus em chanson, plac'h figus
Petra 'erru ganec'h goude qen liez refus ;
Mæs furroc'h dimezit conform d'ho qendere,
Diouallit dioc'h goall lam, dioc'h ar ridou ive !

Rac evel nier goussoc'h hep doutanq ebet
An dud re ourgouillus a vezo discaret ;
Hac evit curuni va chansonie vatant :
En pensieur er mor gant re a naon arc'hant !

(1) An Amzer pe Saturn.